

Pell a Vreiz-Izel

Pell a Vreiz - I - zel, ma bro ga - ret,
Pell eus he - nè, Ma c'ha-lon
gez a zo gla - c'ha - ret, Ha trist i - ve
ma e - ne.
Ne vern pe - lec'h e tre - me -
nan, Me zo di - vro - et! O
ma Dou - e pe - nos e ye - van, Pell a Vreiz -
I - zel ga - ret ?

Pell a Vreiz-Izel, ma bro garet,
Pell eus he nè,
Ma c'halon gez a zo glac'haret,
Ha trist ive ma ene.
Kaer am eus bale ha redek bro,
Dre holl ar bed,
N'hellan kavet levezeg en-dro,
Pell a Vreiz-Izel garet !

DISKAN

Ne vern pelec'h e tremenan,
Me zo divroet !
O ma Doue, penôs e vevan
Pell a Vreiz-Izel garet?

Bez' on bet e Pariz hag e Roan,
Ha pelloc'h c'hoaz !
Gwelet am eus ar c'heriou ar c'haeran,
Hag a zo bet biskoaz.
Er Franz, er Spagn, e bro ar Zaozon
'Meus baleet
Hag an hirnez a vroud ma c'halon
Pell a Vreiz-Izel garet.

E Breiz-Izel em eus ma breuder,
Ouz ma c'hortos,
Ma mam, ha ma douz en dizesper,
O ouelan d'in de ha noz.
E Breiz eman en douar santel
Ma zad kousket ;
Ha me ive 'vennan ket mervel
Pell a Vreiz-Izel garet!

EFFLAM KOED SKOU.